

# VA ZI BIHAN

A bep tu om eus redet, da  
glask an eu-rust-ed, da glask la-bour Da chow-nit va  
bara Met d'ar gér pa zis-tro-an, Em  
c'halon e tan-van ar bli-jadur al le-ve-ne  
via-da Sa deu'n a-vel da c'houe-za ar  
mor da eo-nen-na Sa zi-roll an holl drou-gou er  
go-anw, o nag eo du-di-ud chom er  
gou-dor haer eurus E va zi bi-han ka-ran-  
-te-zud

## -: Oïskan:-

O! me da gar, ti va za-dou illui  
- och e-ged an holl den-zo-riou Kar-get-la-ouen  
a skile-ri-jenn Zi Koz, te zo' vel eur ba  
-ra - doz.

### I

A bep tu, em eus redet,  
da glask an eurusted,  
da glask labour, da c'hounit va bara  
Met d'ar gér pa zistroan,  
En c'halon e tanvan ar blijadur,  
al levenez vrasa.  
Pa deu'n avel da c'houeza,  
ar mor da conenna,  
Pa ziroll an holl drougou er goany,  
O ! nag eo dudius,  
chom er goudor, kaer, eurus,  
Em zi bihan ker karantezus.

### II

Ro digemer d'ar bugel  
dizroet d'e gavel,  
ro d'in nerz, deus da floura va c'halon !  
Me wel aze, dem-guzet,  
Va c'hadorig vourret  
he divrec'h astennet warzu ennon.  
An horolaj o seni  
a sko 'vel kaniri  
hag a laka va gwad holl da virvi.  
O ! va zi benniget  
da vousc'hoarzou entanet  
a laka da dridal va spered.